

Tristidigez

Abaradaeziou ken kaer a wechall, d'ar zuliou ;
Pa'z eem, en eur huñvreal, a-dreuz ar prajou glaz,
Er gwenodennou sioul hag e-kreiz ar hoajou,
En eur zoñjal ennoh, va glahar a zo braz.

Dre druez en em guzit dirazon, bokejou,
Rag ar gwel ahanoh hepken bremañ va glaz,
Lugernit 'vid an neb na skuill ket a zaelou,
Va lezit da ouela va mignonez, siwaz !

Heol skeduz, en em guz a-zindan eur goabrenn,
Grilled ha laboused, lezit ho kanaouenn,
P'am gweloh o tremen, va halon rannet oll.

E-leh an amzer gaer, e-leh al levenez,
D'am spered, d'am halon leun a dristidigez,
E plij eun amzer du, gand eun avel diroll.